

8N2-4-029

Scaëz.

18.

Ia, o va Jezuz, ranna ra hor c'halon,  
Gant keuz ha gant glac'har e c'houlennoù pardon.

19.

Pardon, va Doue, pardon euz hon oll bec'hejou !  
Kentoc'h mervel eghet nevezioù ho poaniou !

### Evit benediction ar vir Groaz.

Etiz a vreman bet' er maro  
Meulomp Jézuz hag he hano  
Ra vo meulet e peb amzer  
Ar Groaz santel euz Hor Zalver.

### OREMUS

Deus, qui unigeniti Filii tui pretioso sanguine, vivifice Crucis vexillum sanctificare voluisti ; concede, quæsumus, eos qui ejusdem sanctæ Crucis gaudent honore, tuā quoque ubique protectione gaudere. Per eundem Dominum.

### Pardonioù Koadry.

Ar pardon bras vez da zul ar Sacramant. 2 offeren, 6 h. ha 10 h. 1/2.  
An eil pardon : d'ar pevare sul a viz Guengolo. 2 offeren, 6 h. ha 10 h. 1/2.

D'ar zul goude an Oll Zent a vez offeren da 7 h. ha 10 h. 1/2. Ar pardon ma zo hanvet pardon Kalagoan.

Da lun ar Pantecost ha da votel S. Stephan, offeren da 10 h. 1/2.  
D'ar guener kenta a bep mis : offeren da 8 h.

D'ar gueneriou epad ar c'horais : offeren da 9 h. 1/2.

Epad ar bloaz e vez lavaret ouspen 100 offeren gant beleyen ar barres ha gant beleyen ar parresiou tro var dro.

Ar bassion vez diskleriet e Coadry d'ar Iaoù-Amblid da 2 h. ha da vñer ar groaz da 8 h.

Induljansou bras zo staget ous ar chapel gant H. T. S. Pi VIII.

### PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 2 Mai 1870.

F. JÉGOU,  
Vic. gén.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

# KANTIK KOADRY

d'an Aotrou Krist.



1.

Jezuz, map an Tad eternel,  
Map Mari dre'r Speret-Santel,  
Gret den hag evidomp maro,  
Ra viot benniget ato.

### DISKAN :

Aotrou Krist benniget  
Ni ho karoo bepred.

2.

It Kristenien, it da Goadry  
Da c'houlen pardon, da bedi ;  
Deskit abred d'ho pugale  
Karet ha servicha Douie.

3.

Kals tud zo ha n'o deus ket bet,  
Añ heur d'oc'h anaout, d'ho karet,  
Ni zo ganeoc'h eur bopl choazet,  
Ha dre ar feiz sclerijennet.

4.

Hon tadou koz tud kalonek,  
E kenver Doue anaoudek,  
O deus savet chapel Koadry,  
Aotrou Krist evit ho meuli.

5.

N'ezuz er vro plas santel kossoc'h  
Na dre ar c'harter brudetoc'h ;  
A bep tu teu pardonieren,  
Ha tud devot ha pec'herien.

6.

Eno ma feunteun ar grasou  
Jezuz-Krist hor Mestr, hon Aotrou ;  
He bassion hag he vuez  
Zo eno peintet a nevez.

7.

Kristenien an amzer guechall  
A zeui ho c'halon da zridal,  
Pa velint feiz ho bugale  
O ficha caer ar Chapel-ze.

8.

Meur a chapel a zo e Scaëz  
Caret oll gant tud ar c'harter ;  
Di ivezan gant levenez,  
Da bidi ar zent aliez.

9.

E Koadry ouspen levenez,  
Em eus glac'har d'am goal vuez,  
Kroas Jezuz hag he bassion  
A lak da ranna va c'halon.

10.

Var eur menez troet d'an avel,  
Vel ar C'halvar var an huel,  
Jezuz euz he Galvar nevez  
A c'half an oll da vont d'he vez.

11.

Eun dra burzudus e Koadry  
A ra estlam meur a hini,  
Eo ar mein-kroaz eno hadet  
Vel eul lec'h gant Jezuz choazet.

12.

Pep tra' lavar deomp eo Doue,  
Mestr an oll draou, krouer an Ee;  
Ar groas dreist oll, ar bassion,  
A dle ternerat hor c'halon.

13.

Pet guech, renet gant va mam ger,  
Oun bet o velet va Zalver  
Er chapel-ma, hag ar zonch-ze  
A zo chomet don em ene.

14.

Abaoue ez an di gant joa  
D'ar gueneriou da bardona,  
Da glevet passion hon Aotrou  
Ha da c'hounit induljansou.



## KANTIK AR BASSION

2 1. 3

Gwelit, ma daoulagad, chetu maro Jezuz !  
Maro eo evid-omp, pec'herien gwalleuruz.

3 3 Diskan :

Maro Jezuz 'vid-omp war vek menez Kalvar,  
P'ez kalon ne ranno gant keuz ha gant glac'har,  
Gant keuz ha gant glac'har ??

2 2.

Tosta, pec'her, ha deuz ; sell-mad ouiz da labour ;  
Pep pec'hed e'ch euz gret zo amà torfedour.

3.

D'ar Juzevien e vé ? d'ezho n'en tamal ket,  
Te c'ch euz roet dorn d'ezho, te c'ch euz ho zikouret.

4.

Ec'harz he dreid, deuz ta da wela da déchou,  
Ha sonch ez int het kacoz derneuz he oll boaniou.

5.

Mar d-eo rusiet he gorf gand ar gwad o redek,  
Te a dle lie welc'hi gant da zaelou dourek.

6.

Evit skuilha daelou, evit touch da galon,  
N'e'ch euz nemet gwelet poaniou he basion,

7.

N'euz nemed eur gouli euz ann treid bete 'r penn,  
Kurnuet eo gant spern, plantet bete 'n empelan.

8.

He gorf zo dispennet, dihompret he izili,  
Hé dreid hag he zaouarn treuzet gant tachou kri.

9.

Gant ar c'hrench hag ar gwad he zremm zo dislivet,  
Ha gant eur c'hoaf gruel he gostez digoret.

10.

Pec'her ha pec'herez, te her c'hrucififi c'hoaz,  
Ha da galon divad 'zo d'ezhan 'vel eur groaz.

11.

Tud tear, tud buanek, tud bepred venjansuz,  
Choui zispenn c'hoas bemdez he gorf sakr da Jezuz.

12.

Danserez ourgouilhuz, na rit nemet bragal,  
Hag ar spern dizamant a blantit enn he dal.

13.

Gwall deod, teod millighèt, dre da gomzou mezuz,  
Bemdez e kriez c'hoas : krucifif Jezuz !

14.

Den gadal reuzeudik, dre da blijaduriou,  
E lekez c'hoas bemdez korf Jezuz a bésiou.

15.

Te ro c'hoas da Jezuz, ô mesvier aheurtet,  
Ar vestl hag ar gwin-aigt da derri he zec'hed.

16.

Evid ho kervel c'hoas, he benn a zo stouet,  
He galon zo digor, he zivrec'h astennet.

17.

Distroit, distroit eta, o kristenien, ouz-in,  
Hag ho pardon d'e-hoc'h oll joauz a aotréinn.